

VICTORIOU

Goneet gant ar Francichen var ar Russianet, abaoe mis Kue-
golo 1854 betek han 30 a vis Mai 1855.

Var ton : Adieu, Pontreco

Selaonit, pobl a Vreiz-Izel,
Ar recit caer ha guicion,
Eus a victorion ar brezel,
Goneet gant hon nation,
Tadou, mamon, deut da glevet
Kelou deus o pugale
A zo deus ar gær partiet
Evit souten an arme.

Nao mis a zo e mon bemde
O scriva fidelament
Ar c'hélou a ve, deus Crime,
Roet d'ar gouarnement
Evel doc'h me a meus kerkent
En faç d'ar Russianet ;
Ha va c'ha'on a dri k'kent
Ma ve eur gombat roet.

Pa voe Odessa bombardet
Bremen zo pevarzec mis
E renkas ar Russianet
Redek buan ar o'his ;
Evel eur vandennat guédon
Spontet gant eur c'hi chace
E yejont d'en em foura don
En eun doul deus o c'hontre.

An toul bras se a zo eur gær
Sebastopol he hanvet
Savet en touesk ar reyer,
Eu peb tu fortifiet
Mæs, eb c'hoi t aon gant e arme,
Ar marechal Sant Arnaud
A yas var ho lerc'h en Crime,
Evit o ziboul eb faut.

Neuze ho breudeur zoudardet,
Gant bevañ ha canolliou,
Var douar ar Russianet
O peus savet tantennou
Eb rancontr den d'ho chaceal ;
Kerkent arme ar Zozon
E erruas, dre eun end all
Ar memeus position.

D'an aontek a vis guengolo
Hon arme a vel, gant joa,
Russianet campet er vro
Var dorguen rivier Alma.
Pevar ha daou ugent mil den
A ziskuel dei gant coler
E ze resolver da zifen
Ar passach eus ar rivier.

An de valerc'h, var dro kreiz de,
Hon arme, hac ar Zozon,
Gant Turkianet deut ive,
Gant seiz pe eiz bataillon,
A deuas da lakit ar spont
En creis an adversourien,
En eur redek kuit e lerc'hont
Pemp mil den var an dachen.

Funnee deves just goude ze,
Hon arme vir torius
E deus goneet adarre
Mour a gombat glorius ;
Forcet e deus ar villajen,
(Lukermann e he hanvet)
Deg mil Russian en dachen
Dindanni a zo cueet.

Kerkent e red, ep arreti,
Betec kær Sebastopol,
Hac e commanç lakat enni
Ar pourron hac an horrol ;
Mæs, an adversour, en devoa
Recevet cals a droupon
Evit krenvañ ha goerussa
Ar gær hac e ramparion

Prudent e voa nenze lezel
An adversourien frankil,
Ken a mijeup allèt sevel
M'guerion cre hac util
Evit-lakat or zoudardet
En abri deus ar vitrail
A dote ar Russianet
Pad an nos ispicial.

G nt ar vail'antis ar vrassa
Ne vije aliet biken
Combatti, na ober netra
Da goll, an adversourien
O c'hant mil den, evel unan.
A vije, gant o skeulion,
Di-karet er forchou buan
Gant mitrail ar c'hanolliou.

Ractal evit obeissa
D'ar general Canroder,
E commançer da vaissa
Ties eneb an amzer
Souden, en eur biochi stard,
Ec'h avanças al labour,
Betek ma c'hel a peb soudard
Tekna var e adversour.

Ar gonan zo cri a yen bras
En bro ar Russianet ;
Ar c'hlenvel a greskas siouas !
Souffrañon ar Zoudardet.
Mæs er Franc an oll familhou,
En f'veur o bugale
A reas cals a znorzonnou
Da dud vaillant ar c'hrime.

Ouspen daou villion arc'hant
A zo evite savet ;
Tapissou tom, ha guin ardant
A zo c'hoas deze casset
Peb ini, ervez e voyen,
E stad, e gondition,
Zo dent calonnec da zouten
Bugale an nation.

Eun nosves an dri varn'uguent
A vis c'hoerver, da zeg heur,
Canrobert a ro da intent
D'he zoudardet hor breudeur
Penes e rontkont attaqui
Ha distruja morailhon
Batisset gant an erimi
En tu deo d'hor linennou.

Daou vatailon a zouavet
Eus an eilvet regiment,
Eus ar marin eun al zo ed
Gant eur general vaillant
D'n em deli var al labour
O doa urz da zistruja ;
Raek-t en deus an adversour
Coll cals a dud a plega.

En nosves se diou vatiment,
Al Léopard ar Fulton,
En eur villajen important
O deus liket ar spouron ;
En eur dostat o deus forcel
Ar c'hozaket da redek,
Deg canon o deus kemeret
Ha kirri ouspen c'huezec.

D'ar zul, trivac'h eus a vis meurs
E commanç c'hoas on arme
En comb jou da gemer peurs
Gant ar Zozon adarre,
Mæs, pa tell d'ar Russianet
Dont en nos d'ho attaqui
Dre vaillantis hor zoudardet
Int forcel da reculi,

D'an dri varn'ugent, d'ar guener
 Var dro deg pe eunnec'heur,
 Dre ma voa tefal an amzer
 Al loar bihan dre valeur
 E c'houas daouzez bataillon
 Demeus ar Russianet
 Gant cals a gri hac a spouron
 Var eun dornat zouavet.

Ne voa ket ingal ar barti ;
 Mæs ractal ar Francichen
 Corf a corf a goumanç cregi
 Ebars en adversourien ;
 Gant cross o fuzul hac gan mein
 Pa n'llient ober guelloc'h
 E tollent ane var o c'hein,
 Hac e c'havancet larcoc'h.

Mæs, ar general Antemarre
 Kerkent a zo diredet
 Gant e zaou regimant leger,
 Ar zeizvet hac an eizvet ;
 Neuze an adversour ractal
 Gant daou vil zoudard a goil
 En deus ranket klek antreal
 Er gêr a Sebastopol

Betec an unan ha tr gont
 Deus a vis meurs divea,
 Ar princ bras Russian a gont
 En deveus collet dija
 Daou c'hant anter cant mil dent just,
 Abaoue bla d'ar poent mant ;
 Gueht ac'hane pegeu rust
 E meump tretet anean.

D'ar zol fask, eiz a vis ebrel,
 Da zeg heur eus ar mintin,
 Et teu or zoudardet fidel
 Et c'hamp d'an ofiç divin
 Evit goulenn ners a zicour
 Eus doue ar c'hombajou
 Da vez trec'h d'han adversour
 Ha da c'honit victoriou.

An de varlec'h var dro teir heur
 Da c'houl n de Canrobert
 A roas, eb dale nemeur,
 Urzon da vombardi kêr
 Ar c'hanollou euzet en dro
 Da vurañt Sébastopol
 A veler neuze dizolo
 Prest da c'hoari eur goal rol.

Ar boutiji hac ar vitrail
 A dol partout ar maro ;
 D'eur vagazin t poul ractal
 O deus gred lampad eno
 Mil Russian, en de kenta,
 O deus collet o bue ;
 Sebastopol a gren dija
 Dirac canol hon arme.

C'hoec'h mil tol canol varn'ugent
 Bemde zo ganti tennet,
 Evit frankat muioc'h an ent
 Var zu ar Russianet.
 Ar spouron hac an disesper
 So en creis an inimi,
 En skei rust memes a ranker
 Vit en lakat da varchi.

Ar batimanchou, eus ar rad,
 Evit souten an troupeu,
 En nos a deus da dostat
 Etrezec a murailou,
 Ha neuze, pep loi d'e dro
 A loskent eur verdeen,
 En eur fila kuit divar dro
 Fortchou an adversourien.

Ar Russianet o doa gred
 Muraillou cren hac huel
 Evit ne mijenp ket allet
 Rei c'hoas de eur goal guentel,
 Mæs ni a zo lem hor lagad
 A plom en hor fuzulou,
 Hac ou-pen e zom potret vad
 A eneb ar c'hanollou

D'ar c'henta deves a vis mai,
 Da zeg heur demeus an nos
 E zomp bet ed, eb ober fe,
 Da droutli en o repos
 Ar Russianet kousket mad
 Gont fianç en o armon.
 Hac eomp ed d'ho ruskellat
 Evel ar vulgarigou.

Distrujet e bet al la'our
 Gred gant ar Russianet ;
 Ar c'henta vai, d'an adversour
 E meump eur guentel roet
 An de varlec'h en deus esseet
 Gont adarre varnomp
 Ar pes on doa varnomp tapet
 Ha distrujt etre-somp.

Goude an dive victor
 Gouet gant hon nation,
 Canrobert a deu gant benor
 Da rei e zémission
 Eus com mandant an arme ;
 Ar general Pelisier
 A zo bet hanvet e c'houde
 Abeurs hon Impalaër.

D'an daou varn'ugent a vis mai
 Erves ma verk Peissier
 En deus roet adarre de
 Eur guden da zicour,
 C'hoec'h mil Russian zo chomet
 Astennet var an dachen,
 Hac ar rest a zo bet spontet
 Gant arme ar Francichen.

An de varlerc'h, evel dija,
 E ze ebommet goal drankil
 Adreus menevon Tchernia,
 Eb dont gant e er subtil
 Da essa tapout d'hon aime
 A pes en deveus collet.
 A heuvel n'en d'enn gal ket cre
 Pa n'en de k t distroet.

D'ar seiz varn'ugent e Kertch
 Couls hac e Leniskale
 E roas hor zoudardet kerc'h
 D'ar Russian adarre
 Kerkent a m'an deveus guelet
 Hon arme oc'h erruout
 Dirasi en deveus renket
 Redec evel eur fitout.

Laket en deus, en eur vont kuit
 Lampad e vagazinou,
 E ganollou, n'eduz distrujet,
 Devet e vatimanchou,
 Anterkant lestr a zo chommet
 Varlerc'h ar Princ Gortschakoff,
 Ho batimanchou aliet
 Zo mistri ar mor d'Azoff.

Daou c'hant deg mil den en Crime
 A zo entre Francichen,
 Turkianet, Zoz-n ive
 Egyptianet ouспен
 Ar Piemont memes dija,
 En deveus, var ar bleuen,
 Gant ar general Marmora,
 Fournisset pemzee mil den,

E m'omp o c'hortos, de ha de,
 Ma vo demp oll annouet
 Penos e ze gant hon arme
 Sebastopol kemeret.
 Ar victor zo en eum laket
 An servich ar Francichen
 Evit ma vezo distrujet
 Arme an adversourien

Epad an no mis passeet,
 Demeus a zeiz amiral
 O devoa ar Russianet,
 Pemp so bed lizet ractal,
 An Impalaër Nicolas
 Daoust d'he oll autorite
 En deus ive ranket, hallas !
 Peris-a dirac Doue.

Pedomp eus a greis hon c'halon
 Maestr an en hac an donar
 Da gonservi d'hon nation
 Ar gallout ac'har victoar,
 Souden e meump an esperanç
 Da velet ar Vretonet
 Gant al lore eus ar vaillanç
 En ty o zud retornet,

Propriété de l'Éditeur.

P. DERRIEN.

Lannion, librairie veuve Le Goffic.